

- 259 -

Dornskridcù Milin : Kanaouennou

86. MICHEL NOBLETS

1. Didoztaid oli bretouned deuz a eskopti Leon da gleved eur verz nevez gant gouir devotion great da zant Mikeal Noblez gouir vignoun da Zoue a zo ganet e Keloudern e parrez plougerne
2. Pa edo en oad a nek vloaz Mikeal a joaze e blas er barrez a Dremenac'h var bordik ar mûr bras abarz koumans e ermitach e c'houlennaz timâd kounje a greiz e galon digant e vam hak e dad.
3. Penaoz Mikeal emezo ha c'hui ker iaouank se penaoz e felfe deoc'hu beva er c'his ze o tont da guitaad ho madou kerent ha mignouned ha c'hui o c'hellout beza en no plijadur er bed.
4. Ia va zud emezan ho kuitaad oll a ran roid ho tanvez d'ar beorien netra ne c'houlennan ar bed man a gavan trompluz ouzpen ma eo danjeruz me fell aar beza bêlek da zervicha Jezuz.
5. En eur garrek var bord an aod er feunteun zo kaved a zo mad oc'h ar boan izili hak ar boan daoulagad eun treujou a zir pe a houarn a vije sur uzed gant ar belerined keiz o tont de darempred.
6. Er garek var bord an aod var bordik ar mûr bras eman an aoutrou Sant Mikeal oc'h ober e ermitach er barrez a Blougonvelin en iliz St Salver eo enterred ar c'horf santel euz an aoutrou St Mikeal.
7. Konversionou Mikeal noblez a zo ken diez da gounta pe ziessoc'h evit ar ztered pa vez an noz zklerra eman breman er baradoz dirak Doue an tad pedomp-en a vyr galon ma vez o hon Alvokad.

vvvvvvvvvvvv